

oferenn nevez

JEZUZ HA BREIZ

EUNN

OFERENN NEVE

ENN PLUNET

Er 27 euz miz Est 1882

D'am mignon Dom Ervoan AR PENNEC.

WAR DON : « *Ar mousik bian* ».

Pe oann bianik em c'havel,

Ma mamm liez a lere :

« Kousk aze, doustadik, bugel,

« Da vamm 'n euz bet eunn hunvre :

« Eur beleg iaouank 'deuz gwelet,

« He mab Ervoan a wele,

« O sevel ouz oter Plunet

« Gand he oferenn neve. »

Ne renn ket c'hoaz en em unan

Ann dro da leurenn ann ti,

« Chileo, 'me mamm, chileo, bian ! »

Ha me a zelle out-hi.

« Laka da dornigo enn pleg,

« Groez doueik, a lere ;

« Rak me 'welo ma mab beleg

« Enn he oferenn neve. »

Ann dud ouz-in a c'houlenne,
Pe dremenent em c'hichen :
« Lar d'in, mabik, pera 'vi-te ?
— « Beleg e vinn » e lerenn.
Hag ann dud vad ouz ma c'hlevet,
Ann dud vad a vouse'hoerze ;
Hirie kalz ann-he 'n euz goelet,
Enn em oferenn neve.

D'abarde-noz ha da veure,
Ha me 'vesa ma loened,
Er parkeier me a gane,
Pe zone kleier Plunet.
Hag em c'hanaouenn e lerenn :
Mar be bolante Doue,
Kleier, c'houi a zono laouenn,
Gant ma oferenn neve.

Red a oa d'in kouitaat ar ger,
Red mad e oa kimmiadi,
Ha mond da gloerdi Landreger
Evid ober ma studi.
« C'hoant em euz, e lere ma zad,
« Mar be bolante Doue,
« C'hoant em euz da welet ma mab
« Enn he oferenn neve.

WAR DON : *Huanaden diwean ar barz.*

Hunvre da vamm zo deut da wir
War ann dro gant bolante Doue,
Ha da dad eo bet mad he c'hir :
Kanet ec'h euz da ofern neve !
Hag ar c'hleier enn ho zour huel,
Ma breur beleg, a zone zeder,
Evel gwech-all, pe oaz pugel,
O kanan gant-he er parkeier.

WAR DON : *Gourc'hemno Doue.*

Allaz ! ar bed-man zo dispar,
Mesk he joaio bepred glac'har !
Me ne welann ket 'nn ez kichen
Kement hini hag e karjenn...

Da vreurik paour, pelec'h eman,
Pe glee hirie bout aman ?..
O welet ann oll ker joaiuz,
Zantik (1) vije bet evuruz.

Evurusoc'h eman du-hont,
Du-hont elec'h m'hon deuz da vont !
He vreur 'n euz klevet euz ann Ee
O Kanan he ofern neve.

(1) *Zantik* (Alexandre) Ar Pennec marvet eur miz-hantez zo, en-
kreiz ober he studi enn kloerdi-yan Landreger, a zo kont an-
nehan aman. Eur potr fur hag eur potr a skiant a oa. Doue d'hen
pardon !

VEL ANN EIL TON.

Dec'h en eur vont da Drogeri,
Tal ti da baeron 'onn tremenet,
Ti zand Ervoan ar Minihi,
Hag evid-ont em euz-han pedet.
Plunediz, c'houi bedo kalonek,
Evel ma lere d'hac'h ho person,
Ma vo zant ma mignon beleg.
Vel ma oa zand Ervoan he baeron.

Joa ha trugare a larann
D'hac'h-hu, tud vad, a zo deut aman,
Ha dreist ann oll, Otro Person,
Trugare d'hac'h a greiz ma c'halon !
— Gant neb a deui zonz euz ar barzik,
En eur kanet d'hac'h he ganaouenn,
E c'houlennan eur bedennik,
Ma vo bepred gwirion ha laouenn.

BARZIK KOATNIZAN.